

Dizano

Diviz etre eur hliant yaouank hag eur riskerez koz

War don : *Paotred Plouillo*

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, bet ez oh koant gwechall ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon kêz, koantiri 'zo eun dra fall ;
Koulskoude e oan plah terrupl, degajet, krohennet kaer,
Va lañchenn distagellet, va lagad lemm ha seder.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, bet ho-peus servijerien ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon kêz, rag n'houl ket ar veleien ;
Koulskoude ne oan ket skornet, plijoud a ree din Pipi,
Ha pa frote eur plah all e santen 'vel jalouzi.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, tenerret 'deus ho kalon ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, rag ar pech am-oa aon.
Koulskoude eur zulvez pardon e houllas ker brao ouzin
Rei dezañ eun toullad pokou, ma oa red din asantiñ.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato 'oant ket pokou penn-da-benn ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, n'avanturis va hrohenn ;
Koulskoude eun nozvez bennag ma oan o prezeg dezañ
E prezegas ker brao ivez ken a riskis, a gredan.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, risket ho-peus c'hoaz goude ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz, va mignon ker, ndemed an noz valeuruz-se ;
Koulskoude, 'vid lavared gwir, aliez pa zivunen
E vezen meurbed souezet o kaoud Pipi em barlenn.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato, riska¹ ‘rafeh c’hoaz bremañ ?

Ar plah

O ! nann, biskoaz va mignon ker, gwell ‘ve ganin perisa ;
Koulskoude mar ve red absolu ober se d’ho soulaji,
N’e-mez asur ar galon da zoned d’ho refuzi.

Ar paotr

Leveret din, moereb Kato,, dre an hent-se ‘h eer d’an Neñv ?

Ar plah

O ! nann, biken, va mignon ker, ne gavfeh ker reiz hag eñ.

Ar paotr

Ho trugarez, moereb Kato, ho kelenn n’eo ket fall,
Ha koulskoude ‘vid ‘n em zalvi, me ‘gemero eun hent all.

*Bet embannet e diwez an XIX^{ved} kantved pe e penn an XX^{ved}, gand ti-moulla Koad ar
Hornog.*

Ano skrivagner ebed.

¹ riska : ober ar pezh a ra ar riskerez gand eur paotr.